

Nnn 140

Louarnia

DEUS DA VEZAÑ
UR MAILH
WAR AN

DINOGAORED

EMGAV P.7
GANT AN
IGWANODON

YEAH!

En niverenn-man :

DISTAG
HA
PLEG
DA
LEVRIG
DIWAR-BENN AN

Igw Anodon

Naggeneen



C'HOARIOÙ

Samuel
a di
da di



- 3
- 7
- 9
- 10
- 11
- 12
- 13
- 14
- 15
- 16

PAOTR LOUARN




TITEUF

**SANDRINE
HAG AR
C'HEZEG**




**REKIPE
GANT CHOKOLAD
HA FLAMBOEZ.**



MEURIAO

En niverenn o ton



Louarnig

Mensuel - N°138
du 1^{er} mars 2014
5€ an niverenn / 5€ le numéro
60€ ar bloaz / 60€ l'année
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /
Dir de Publication :
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhierz ha maketenn
Coordinatrice et maquettiste :
Camille Argouarc'h,
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU
Skeudennoù a zo implijet gant
Aotre-Implijout Creative Commons
Dereñ/Kenrannañ
Credit photo CC : Jin Linwood
(p.1 Triceratops)

Embannet gant skoazell
Avec le soutien de :



PETRA 'NEVEZ ?



DIZALE E C'HELLI MONT
DA SURFIÑ WAR :

Ya-ouank.com

« AL
LEC'HIENN
EVIT AR RE
YAOUANK
HEPKEN!

HEPKEN!



POLTRIDI
C'HOARIOÙ
SONEREZ

VIDEOIOÙ
PELLGARGAÑ TRESADENNOÙ
KINNIG PENNADOÙ




TENNET 'TEUS MA FOLTRED ?

DIVINET 'TEUS !

DIVERK ANEZHAN ! MOP ALL...

MOP ALL, PETRA, LEILA ? O VONT DA LARET D'AR C'HELENNER 'MAOUT ?

OUAOU, BEC'H VO !



'TEUS KET DROED.

REZ KET BIL, EMAON O VONT DA LAKAAT AC'HANOUT BRAVOCH... UN TAMM WAR AR FRI...

HA MOP, ENLINEAN WAR FACEBOOK !



BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP



"KETT MA NE ZEUVONT KET WAR MA CHOUK..."

"PAOUR-KAEZH."

"FORZH PETRA."



"PN 'N 'TEUS GRAET SE ?"

"POL PE UNAN DEUS O STROLLAD."

PE... PETRA AN DIAOUL 'TEUS GRAET... ?!

"FARSUS."

"LOENED LOUS !"

"GWELL A SEP"

"PN VO TA-PET GOUBE ?"

O, NETRA TOUT ! MIL-YRUPET VI !



"O, GAST !"

"GRAET BRISTRA-MAT !"

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

"UR PEMOCH !"

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

"JUSTIK."

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

BI-DIP

"GHEWELDIR"



PEOCH ! WARC'HOAZH 'VO AN DEIZ DIWEZHAN A-RAOK AR VAKANSOU.

ECHUET VO GANT 'KONTADENN AN NEDELEG'.

KEN WARC'HOAZH.

DEUET EO
BRAY GANIT !
TEUS KET C'HWITET
WAR DA DAOL !

ANZAU 'RAN !
KRIZ DA VAT !

E,
SALSEPO !

PETRA ?

SETU,
GRAET TEUS
REUZ...
HA KONTANT
OUT ?
AET ON PASE-SKUIZH-
GANIT HA DA VIGNONED
A C'HOARI GANT
FACEBOOK !

FENT EO,
NIZAR, OUIH-
PENN-SE NE OAS
KET TAGET.

KET TAGET ?
GRAET TEUS
UR PEMOC'H
DEUS LEILA !

MAT EO BREMAÑ !
ARABAT BEZAÑ
PARANO
KENNEBEUT !

N'EO KET MARU
MIL DEN !
OBER GOAP
NE RA KET DROUG.

OBER GOAP,
NE RA KET DROUG ?

HAG AR SKLAVEREZH
KENNEBEUT
KEMENT HAG OBER ?
HA PARANO ON C'HOAZH,
MOARVAT ?

OPALA !
AON MEUS !
SETU FLAER
EM BRAGOÙ !

HA BREMAÑ
RO PEOC'H
DIN.

N'EM EUS
KET ECHU
GANIT-TE !

D'AR POENT-SE,
YA,
DIOUZH KLEVET !



O.
ERC'H A RA !

KENTAN GWEC'H
E VO DIAES
OBER
GWELLOC'H !

E E, BERZH
EM EUS GRAET
C'HOAZH.

DONT A REZ
DA BAKAN
UR BANNE ?

WARC'HOAZH
KENTOC'H.
KENTAN GWEL !



KROG
ENNAR, KROG
ENNAR !!

PET- ?

HA SE ?
NE RA KET
DROUG, PAOTR ?



URG !



BECH DE'I,
SKOOMP
GANTAN !



HA NEUZE ?
N'OUT KET
FOUGASER KEN PA
VEZEZ DA-UNAN !



PAQUEZIT,
TE HA DA
VIGNONED,
GANT HO
KONIRI...



LAOSK
Y'HANON !



O, GAST !
MONT A RA
GANIT, NIZAR ?

AAA !

BOMBEZEN-
NET EN DEUS
LUV WAR E
ZREMM !



PAKET VO
ANEZHAN !

PAK... ?
EU, N'OUZON
KET, NIZAR !

WAR-ZU AR FEST
EMAN O REDEK,
RE A DUP ZO...
ARABAT MONT RE
BELL 'MESTRA !?

'RAN KET
FOUR'.
PAKET VO
ANEZHAN !

6 Stumm
e dreid dirak
a denn ouzh
daouarn ken-
toc'h : kentres
int. Gall a rae
en em zifenn
ha plantañ e
sentrell e kof
an teropoded ?
Ha dantañ
anezho war
memes tro ?

7 Ur biz bihan en deus ivez...
santañ e c'helle trapout e voued.
Fin ! Meketa ?
Ha sant an tri biz all e kerzhe ?



8 Santañ an hini eo eo bet ijinet ar
som-chaok ? Derc'hel a rae e voued en e ves,
'barzh e divjod, has e sizh-se c'helle chaokaat
pa teue an naon dezhañ en-dro ?

Deus da vezhañ ur mañh war...

An dinosaored

8 sekred
kontet
dit !



Pouez : etre 4 ha 5 tonenn

Uhelder : etre 4 ha 5 m

Ledander : etre 6 ha 11 m

Boued : plantennoù

Mod da vevañ : e troelladoù



DINOSAORED

Vell ouzh an heuliad
en abadenn Mouchis Dall
war France 3 Breizh
her sador vintin da 10e20

Diwar heuliad FR3 Breizh « An Dinosoored »
sevenet gant Ronan Hirrien - Kenproduet gant France Televisions
Park ar Rannistor Malatsea/Parc de Préhistoire de Bretagne

1 Isuadnodon a dalvez :
dant an Isuadn.
Ewir eo o deus ar memes
dent has an isuadned ?

2 An dinosaor kentañ bet kavet eo ?
W'eo ket an hini brasañ...
5 pe 6 metr ad uhelder « herken » eo ?
W'eo ket an hini kreñvañ kennebeut... met
undn souest da stourm ouzh ar re zrouk ?

3 We bliu ket d'an
isuadnodoned bezañ
o-undn. En o bleud e
vezent e troelladoù.

4 Ur seot debrer eo an
isuadnodon... ha me lar deoc'h, lonkañ
a ra kalz kalz kalz a voued ?

5 Daoust dezhañ bezañ
war 4 pev eo souest an Isuad-
nodon da sevel war e 2 bav
a-dreñv da sutuliañ an delioù
a bliu dezhañ er swez tro-dro ?





SANDRINE, PERAK E CHAOK E-PAD PELL AR C'HEZEG ?

Nina,

Geot-debrerien eo ar c'hezeg. Sell outo en ur prad : peuriñ a reont e-pad pell.

Ma roez ur garotezenn d'unan e weli ne chaok ket er memes mod ha te : e javed*-traoñ a fiñv eus an tu dehoù d'an tu kleiz.




Pa vezez te o chaokañ, e fiñv da javed-traoñ eus an nec'h d'an traoñ (Estreget pa vez ur chewing-gum ganit marteze !)

Debriñ a ra ar c'hezeg geot ma troc'hont gant o dent a-raok (ar rakdent). Malañ a reont ar geot da-heul gant o c'hildent evel ma vije malet greun. Setu e vez graet tammoù bihan gant ar geot hag aesoc'h eo dezho lonkañ war-lerc'h. Degaset vez halv* ivez betek o genou ha dreist-holl pa vez sec'h ar boued (foen da skouer) betek 30 litrad bemdez !

Dre fors frotañ o dent ar re ouzh ar re all, dent an divjaved a zeu da vezañ teuc'h. Met eurüsamant e kreskont dibaouez ! Setu o deus ar memes ment ingal. Pa vez sellet ouzh dent ar c'hezeg e c'hellomp gouzout o oad hervez tres an dent.

Ur marc'h kudennoù dent gantañ ne c'hello ket lonkañ na koazhañ mat ha mont a raio war dreutaat : ezhomm 'no mont da welet an dentour !

Dentourien arbennikaet war ar c'hezeg eo a zeuio da livnañ* e zent ma vez ezhomm.



Sav ur goulenn ouzh Sandrine ! Ma rez un dresadenn, e vo embannet ivez ! Skriv ur postel da camille.kvb@orange.fr pe ul lizher da Louarnig, Keit Vimp bev, 22 grand rue, 29520 Laz



Goulenn ha tresadenn gant Nina

Ne chaok ket ar c'hezeg a-hed an devezh. Ar saout eo a ra kement-se. Gallout a rez gwelet anezho gourvezet er prad o peuriñ : daskiriered* int. Komzet vo eus ar saout ur wech all.

Ken ar wech all !

Sandrine

Geriaoueg

Javed : skorn m'emañ plantet gwizioù an dent ennañ

Halv : Dourenn fardet gant ar c'horf o tont er genou

Livnañ : Gant ul livn e lakaer ur stumm teuc'h da vezañ plaenoc'h

Daskiried : loened hag a vez o peuriñ hag o tebriñ geot dalc'hmat.

un
dioul a
bej



Z. R. DUPLAN



Naggeneen


SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU

BREZHONEG : C. ARSOUAREZ HA Y.F. JACZ

DIBABET EN DOA
NAGGENEEN AR SAL-SE
PEOGWIR E DA ENO UN
DUELLENN BETEK EN DIAVAEZ.



GANT AN DUELLENN-SE E
C'HELLE AR MOGED HAG AR
C'HWEZH MONT KUIT.



ER YENN ALL EN EM
GAVE AN DUELLENN
EN UR C'HAV.




UR PLAÑCHOD A DA HEYKEN
ETRE AR C'HAV-SE HA
REZ AN DOUAR...



...E TI BOURC'HIZIEN
EUS NEW YORK,
E KREIZ-KÉR.

KEN MAT 'DA AR
C'HWEZH MA SAVJONT
HOLL DIOUZH TAOL EVIT
KLASK HEULIAÑ AR
AEZENN-SE GANT O FRI.

SED AZE DISOC'H REKIFE BURZHUDUS NAGGENEEN.
PREST E DA WHISKY NAGGENEEN DA VEZAÑ TAÑVAET GANT AR RE ALL.



DA VEZAÑ KENDALC'HET...

DIVIN 'TA !

PETRA A ZOUGFE UR C'HARGAD FOENN HA NA ZOUGFE KET UR SPILHENN ?

PETRA A DREUZ AN DOUR HEP BEZAÑ GLEBIET, HAG AN DREIN HEP BEZAÑ PIKET ?

PIV A RA FURCH-FURCH DRE AN TI HEB DAOLAGAD NA FRI ?



DIT DA GAVOUT AR RESPONTOÙ E-MESK AR GERIOÙ-SE : AN HEKLEV, AR GLAV, AR SKUBELENN, AR MOR, AR GORVENTENN, AR BANN-HEOL, AN HEOL, AN AVEL.

ME A RED HA GAR N'AM EUS KET
ME A GOMZ HA TEOD N'AM EUS KET
ME A GLEV HA SKOUARN N'AM EUS KET
HA GANT AER E VEZAN KASET...

PIV ON ?

DIWAR DASTUMADENNOÙ JULES GROS

SUDOKU

AES

		6			2
	2		1	5	
3					
					3
	6	4		1	
1			6		

ETRE

	6		4		
4		3			
		1		5	
	3		1		
			5		6
		6		1	

DISOC'HOÙ

5	1	6	4	3	2
4	2	3	1	5	6
3	4	2	5	6	1
6	5	1	2	4	3
2	6	4	3	1	5
1	3	5	6	2	4

1	6	2	4	3	5
4	5	3	2	6	1
2	4	1	6	5	3
6	3	5	1	4	2
3	1	4	5	2	6
5	2	6	3	1	4

Penaos e vez lâret...



« KET »

« NANN »

« PAS »

e yezh ar sinoù ?

EN E SAV EMAN DA VIZ YOD,
HIJAN A RA EUS AN
TU KLEIZ D'AN TU DEHOU.
PLEGET EO DA VIZIED ALL.



Katevenn Chokolad

get un dienn flamboez ha chokolad gwenn

Evit ur gatevenn ho peus afer a :

- 200g chokolad du (x2)
- 100g bleud (x2)
- 140g sukr (x2)
- 140g amonenn (x2)
- 1 sac'hadig sukr vanilh (x2)
- 1/2 sac'hadig goell kimik (x2)
- 4 ui (x2)

Evit ar gatevenn-mañ emañ ret deoc'h gober div gatevenn chokolad hag ur farz flamboez.

Raktommit ar forn da 170°C.

Dourgibit ar chokolad hag an amonenn.

Kejit ar sukr hag an uiou betek tapout ur meskaj spoumus.

Lakit ouzhpenn ar bleud hag ar goell ha meskit betek kaout un toaz unvan.

Ouzhpennit ar chokolad teuzet ha kejit.

Skuilhit an toaz barzh ur moull ha laoskit ar wastell barzh ar forn e-pad 30 vinutenn.

Komañs en-dro evit gober an eil katevenn.



Menam menam !



Bremañ, evit ar c'hoaven flamboez-chokolad gwenn ho peus afer a :

- 250g chokolad gwenn
- 200g pe 300g flamboez (hervez dac'hoant)
- 30g amonenn
- 150g dienn dourennek

Emañ ret deoc'h :

Toemmiñ ar dienn dourek betek ma vervo.

Lakat ar chokolad e tammoù hag an amonenn barzh ur beñsel.

Lakat ar chokolad e tammoù hag an amonenn barzh ur beñsel.

Skuilhiñ an dienn ar ar chokolad ha meskiñ betek kaout ur meskaj unvan.

Lakat ouzhpenn ar flamboez ha meskiñ.

Lakat ar meskaj er yenerez 3 euriad da nebeutañ.

An dres :


Lakit an dienn chokolad-flamboez ar ar wastell gentañ ha lintrit mat.

Lakit ouzhpenn an eil gwastell ha lakit ar wastell er yenerez e-pad un euriad evit rielliñ ar farz.

Setu ! Prest eo !

Samuel, beajour ha kontour a di da di

Abae
2002 emañ o
veajiñ, leun ma sac'h gant
kontadennoù. Graet em eus div
wech tro ar bed o c'hoari
biz meud !



Hennezh a anavezez dija marteze ?

... rak tremenet e oa e pep korn Breizh pe dost. Ha ma c'houlenez gantañ "Eus pelec'h out ?" e responto dit : "eus ar bed a-bezh !"

Abae 2002 emañ o veajiñ. E pep lec'h eo bet degemeret e ti an dud hag er skolioù evit kontañ istorioù, sekredoù, c'hoarioù, en ur vouc'hoarzhin bepred.

Pa vez Samuel o c'hoari biz-meud e kej ouzh ur bern tud digor o spered. N'eus ket kalz anezho o deus aon rak Samuel abalamour m'eo un den estren. Dre forzh seniñ, jongliñ, ha kanañ e lak Samuel an dud da gaout fiziañs ennañ.

D'ar 7 a viz Genver 2014 : setu aet kuit Samuel gant an hent da Vro-Gembre. D'ar c'huzh-heol e ya da welet ul lec'h brudet e Bro-Saoz : mein bras Stonehenge.



"Setu un dijuniñ bet fardet evidon gant Rose, ur vaouez a Vro-Saoz em eus kousket en he zi. Vioù, kig-moc'h, ur banne kafe, menam !"

D'an 20 a viz Genver e oa erruet Samuel e Bro-Gembre :
 "Mont a ra mat gant ar veaj. Emaon evel ul logodenn war un
 tamm fourmaj ! Erruet on e Aberystwyth. Plijus eo daoust
 d'an amzer bezañ fall !"



Bet eo Samuel
 o welet daou
 glasad :

Setu ar sifroù e kembraeg : Un,
 dai, tri, pedwar, pimp, chwech,
 seis, wyth, naw, deg



fresh meat
 cig ffres



bread & cakes
 bara a chacennau

"Gouzout a rez eo ar c'hembraeg tost a-walc'h
 eus ar brezhoneg? Eno e vez klevet kembraeg er
 staliou, en ti-post, lennet war an hentoù. Komz a
 reont saozneg ouzhin hag kembraeg etrezo.
 Gwechall e oa ret komz e saozneg.

Difennet e oa d'an dud komz kembraeg."

Er stal boued e kav Samuel gerioù hag a oar dija :

KEMBRAEG / BREZHONEG

dened : deñved
 buwch : buoc'h
 bara : bara
 cig : kig
 llaeth : laezh



Mont a ra Samuel war-zu hanternoz
 Bro-Gembre etrezek ar menezioù...
 hag an erc'h !

"Kregiñ a ra an amzer da vezañ yen.
 Met tomm eo kalon an dud ! Mont
 a ra mat ganin ! Bro-Gembre a blij
 din !"



"Un nozvezh brav a zo bet gant
 Kembreiz a-zoare : kontadennoù, dansoù
 ha kanaouennoù zo bet. Dañset hon eus an
 andro, an hanterdro, ar rond-de-st-vincent,
 hag ar gavotenn evel-just ! N'em eus ket
 desket mat dañs Bro-Gembre met klask a
 rin kaout soñj outañ."

Erruet eo Samuel e Holyhead Porz. Poent eo dezhañ mont gant ar vag betek Bro-Iwerzhon.
 Da heuliañ... !

